

Tisey un n'pud



a b k d e f g h ch c'h i j

A B K D E F G H I J

l m n o p r s t u v w z

L M N R T U

t g r n f ch v s m j z

p d b k c'h w h l

a e i o u

ab (1) eb ib ob ub

ba be bi bo bu

(1) Leret ab, ba enn eunn tol, elec'h a-b, ab;
b-a, ba.

pa	pe	pi	po	pu
ka	ke	ki	ko	ku
ga	ge (1)	gi	go	gu
ha	he	hi	ho	hu
cha	che	chi	cho	chu
c'ha	c'he	c'hi	c'ho	c'hu

da	de	di	do	du
ta	te	ti	to	tu
ra	re	ri	ro	ru
zu	zo	zi	ze	za
so	sa	si	se	su

ab	ap	ad	at	ar
eb	ep	ed	et	er
ib	ip	id	it	ir
ob	op	od	ot	or

(1) **g, h, ch, c'h, w.**
gue ach ehaeh c'haeh ou.

g ve lennet evel pa vije **gu** ha nann evel **j**; **w** zo evel pa vije **ou**, **s** evel diou **s** ha nan evel **z**.

ub	up	ud	ut	ur
ig	ik	az	as	em
of	ov	al	an	it
aj	ach	et	oc'h	ev

bla	ble	bli	blo	blu
bra	bre	bri	bro	bru
pra	pre	pri	pro	pru
kla	kle	kli	klo	klu
kra	kre	kri	kro	kru
gra	gre	gri	gro	gru
c'hra	c'hre	c'hri	c'hro	c'hru
sta	ste	sti	sto	stu
ans	ant	ent	int	ont

ba l	be l	bi l	bo l	bu l
ja l	je l	ji l	jo l	ju l
c'ha p	c'he p	c'hi p	c'ho p	c'hu p
t ag	t eg	t ig	t og	t ug
v ar	v er	v ir	v or	v ur
m as	m es	m is	m os	m us


	ia	ie	ei	eu	ou
bia	bie	bei	beu	bou	
ria	rie	rei	reu	rou	
tia	tie	tei	teu	tou	
grei	breu	frou	plou	kleu	

San tez Ma ri mamm Dou e,
pe det ev id omp pe c'he rien,
bre man hag enn heur hon
ma ro. Ev el se be et gret.

Peg er kaer ez eo mamm
Je zuz ! peg en dous ha mad
el ez uz !

Oh ! n'eo ket gaou a lav ar az
ann tad ou sant el a skriv az :

« Biskoaz den n'en deuz ho pedet,
» Gwerc'hez, hep bean chelaouet. »



ANN DELEN (1).

Ton : *Ann hini goz.*

Ma c'halon zo
Gant ma bro,
Oh ! ia, ha bepret vo.

Dilezet war gerreg ar mor,
Tevel a re ann delen aour,

He c'horfig anter zigoret
Hag he c'herdinigou torret ;

O welet eunn dizeur ker braz
Ma c'halon ivez a rannaz ;

Me gavaz ennon eunn nerven
Hag hi stagaz ouz ann delen,

Eur gordennig a garante ;
Ar re all a stagiz ive :

Evit peb oad, evit peb stad,
Breman zon ar zonerez vad.

(Levr *Telen Arvor.*)

(1) C'est la Harpe d'Armorique.



PEDEN AR MOUSIK BIAN

D'AR WERC'HEZ.

War don : *Potred Plouilliou. Kan 73.*

Ma mammik gez ha ma ferson
A lavare d'in bemde
Ho pedi a greiz ma c'halon
Ha da noz ha da veure.
Ma chelaouet, Gwerc'hez santel,
Evit mamm ho kemerann,
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell
War ar paour mousik bian !

An evnedigou pa greskont
A ia er mez euz ho nez :
Da gentan gant aon e nijont ;
Ho mamm zo war ho evez,
Pell man ma mamm, Gwerc'hez santel
Evit mamm ho kemerann :
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell
War ar paour mousik bian !

Pa m'euz bet laret kenavo
D'am mamm gez war he gwele :
Pegouls, em-hei, e vi distro !
Ha ma mamm baour a wele.

Dinec'het-hi, Gwerc'hez santel,
He foan eo ma foan vrasan :
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell
War vamm ar mousik bian !

Ma c'hoarik vad, ma c'hoar Anna
A iel d'ann iliz bemde
D'ho pidi c'hoaz, itron Varia,
Vit ma zad, vidon ive,
Chelaouet-hi, Gwerc'hez santel,
Eunn ine diouz ar gwellan :
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell
War c'hoar ar mousik bian !

Pa iemp da laret hon peden
Hon daouigou d'ho chapel
Ma c'hoar lare : « Sell eunn dolen
» War-n-hi ar Werc'hez santel
» Hag a c'hoarz ouzimp gant true !
(E oamp enn oad teneran ,)
» Ma sellet ha ma breur ive
» Ar paour kez mousik bian ! »

Enn ho tolen , o Gwerc'hez kaer ,
E weler ho mab Jezuz
War ho ti-vrec'h , bugel dister ,
Ken mad , ken karantezuz.
Ho mab dinac'h netra ne hall ,
Dac'h , mamm ar c'halloudekan ,
Gallout a hellet ta diwall
Ar c'hez paour mousik bian !

Ma mamm a lare d'in liez
Eo mestr a bep tra Doue ;
Mes Jezuz zo Mab ar Werc'hez,
Petra n'hell mamm eur Roue ?
Ma diwallet, Gwerc'hez santel,
Evit mamm ho kemerann ;
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell
War ar paour mousik bian !

